

GUERZ TRUEZUS

VAR SUJET EUR BUGUEL YAOUANC

A zo bet tri bloas dindan ar Pazennou 1881

VAR EUN TON TRIST

Bretonet a Vreiz-Izel tostañ da glevet
 Recita en guirionez ar pezh zo eruet
 An oll a deui da greña o clevet kement man
 Mar gellan condu va fluen evit en discleria
 Kals a draou vez disklèriet abeurs ar journalliou
 Aliès rent guirionez ag alies rent gaou
 Mes ar pezh a zisklèrian a zo re vir sioas
 Disoloet e ar c'hrim en miz maë vit ar bloas
 En eskopti euz Roazon tostlig da ger Vitre
 En eur barozic vian e ano sant M'herve
 Oa eur famill tud fall gant an diaoul possedet
 Mes evit o recompanç e zint bet oll barnet
 Ar verc'h deus an ty-se eur plac'h yaouanc kollet
 Gant eur c'hemener yaouanc a zo bet debochet
 Aben eur pennat goude eur buguel e deus bet
 En ty eun amièguez bars er gher a Vitre
 An amiègues o clèvet e deoa brudou fall
 E dalc'has bars en e zy vit donet de diaol
 Neuze ar buguel a zo kasset deur vagueres
 Vit na vije ket brudet en e amezegues
 En pad eis vloas ar buguel a zo bet o vaga
 Ep bea bet e vam eur vech o velet anezan
 Ar c'hemener a baëe ar miziou magueres
 Beteg ma'neoa klèvet oa maro e vuguel kes
 Ar buguel a oa savet eur buguel dilikat
 Nemet ma ne anvëe allas na mam na tad
 Rag en pad eis vloas e bet en ty e vagueres
 Ep bea bet biscoas onte nep seurt anoudegues
 Comprenit breman christenien petra o devez gret
 An dud cruel a mechant goas evit tirantet
 Petra o deus invantet ober d'ar buguel keas
 Pa zonzan en dra man on leun a dristidigues

Ar bourrevien a deu da gondaou dar maro
O foaniou buan a basse ne vent ket ker garo
Vel m'he bet an inoçant man gant e dud kondaonet
Da chom pad tri bloas ep fiachen eun toul en secret

Eur voëst o deus preparet da lakat anezan
Leun a doullou bars er c'har evit rei er dezan
Mes dirag ar vagheres deus ket kredet ober
Mes pa int deut var an hent o deus gret o afer

En eur autren bars en ty o deveus bet tennet
Ar buguel paour deus ar c'houfrag o deus en laket
Ebars er forn eur pennet gante e bet poset
Evit ma ne vije ket o c'hrim disoloët

Eis debes ebars er forn a neveys passeet
Mes neuze o deus songet an tri den millighet
Vije bet klevet e voës gant tud o passeal
Pez a laqas ane da chench plaç dean ragtal

Eur c'havel bian er c'hao o deveus bet poset
Ag eun dornat plous ed du ennan o deus laquet
Gant eur gos rochet de dad cos ar buguel zo paqet
A da vant e bars en toul-ze ragtal e condaonet

Oh c'hui tadou a mamou selaouit kement-man
C'hui ispicial tud tener a deuyo da oëla
O velet peguer cri e eur vam en andred e buguel
Guelloc'h vije bet dei rei dean an tol marvel

En pad eur mis a tregont e bet ar buguel-ze
O soufr eur verzerenti ar brassa en toul-ze
Ep bea goët netra gant an amezaien
Neus renket ar buguel paour soufr kals a yenien

Peder batatezen bemdez e neoa evit boëd
A dour a guinaigr da efa pan divige sec'het
A ma nige ar malheur da glem vige lavaret dean
Vige laquet en eun toull en douar da vreina

Tri c'honhan neus passeet ar buguel en toull-ze
Ag e vam en e guichen kousket en eur guele
Ep na gemere ar plac'h man truez deus e buguel
Collet oa gant an droug speret ar vechantes cruel

Mes ar mab demeus an ty a deuas da glenvel
Ag abers eur pennat goude a deuas da vervel
Diou deus an amezaien a deuas da veilla
Ar chor^e oa var ar varsaon evit an nos kenta

Ag int bcn eur pennadig ag o clevet eur voëz
Evel eur glemaden ne ouient deus pelec'h
Ag int ag o lavaret ractal an eill deben
An ini maro a remu a gouskoude et yen

Mes allas an eill nosves e clevent ar memes tra
Neuze deus anaveet moëz eur buguel er vec'h man
Ragtal o deveus songet e oa an dud fall-ze
O deoa clenket o buguel en eun tu a goste

Ragtal et zegont dar guer evit laret do zad
A da rei anoudegues deus ar c'hrim effroyabl
O zad pa neveus clevet dar mear neus lavaret
Penos e oa en ty-man un c'hrim disoloet

Pa deuas tud an ty-man deus an anteramant
E oant chomet tout carguet eus an estonamant
O velet an archerien oc'h ober faction
Da c'hortos an dud man da renta de reson

An archerien a c'houlent deus ar plac'h yaouanc man
Pelec'h e oa e buguel oaget a uneg vloas
Ag ar plac'h mal heurus man a respontas deze
Penos e oa o voga en eun ty var ar mes

An archerien a respont c'hui a lavar gevier
O pughel a zo aman pell a zo en miser
Digorit demp an toull man evit ma vo guelet
Ag en ne man ket aman ar c'hristen peut ganet

Mes an archerien qerqent vel mo deus digoret
O femp e coënt eno qazi evel semplet
Eur pennet mad ez int bet ep gallout koseal
Po deus guelet ar buguel en eur stad ker barbar

Mes neuze e bet tennet ar buguel ac'hane
Bars en eur stad an trista a ouffet da velet
Ag a reman a zo bet var an eur garotet
Vit ma vident da Vitre o zri ragtal kasset

Ar buguel zo bet casset bars en amezegnes
Evel eur procession e teu tud dy bemdez
Evit goelet anean ag ar plac' lec'h ma oa
E tired an dud bemdez evit er bisita

Demeus ar guer a Vitre deus ar guer a Roazan
E tired an dud bemdez vel eur procession
Deus ar guer a Zant-Briec, deus ar guer Baris
A zo bet eur bobl imañç o velet ar supliç

Dan drizeg eus a vis cost un a pevar ughent
E zint bet apparisset dirag ar varnerien
E c'hourdassis en Raon e zint bet kondaonet
Dar poaniou a velot aman varlec'h rapportet

Deus adaleg an tribunal a beteg ar prison
A oa ouспен tri mil den var ruyou en Roan
Evit goelet an tri man o vonet da juji
Tre daouarn ar archerien an dud-ze ken impi

Da naveur demeus an nos e ze bet prononçet
An arêt eus o setañç zo gant ar Jury gret
An tad cos da zaouzeg vloas deus a reclusion
E vreg en pad e buez kondaonnet dar prison

Ag ar vam ken dinatur e deus bet ugent vloas
Evit e funition rag mèritet e deoa
Goelloc'h e vige bet dei mont bemdez da glasq boëd
Vit merzeria e buguel pini deoa ganet

O c'hui tadou a mamou karit o pugale
Ne c'hit ket do goal dreti grit atao vad deze
Evit goude o maro beza recompanset
Gant Jesus en e c'hloar en pales en drindet

An ini a neveus gret ar reçit a nevez
Na var ar vezerenti demeus ar buguel-ze
A oa bars en ker Raon pa e bet an affer
Ag e neveus er rimet pe neur gavet er guer

E ano vel m'er gouzoc'h ne ket dishanveet
Rag me a gred e partout dre ar vro oll brudet
Eur baleour dre ar vro Yan an Taoc e ano
A zoet dec'h ar Barados goude eur ar maro

Propriété de TAOC et MERRER

Fin.

Montroulez, imp. A. Chevalier